


# AR BEDENN EVIT AR VRO



Embannet gant  
UNVANIEZH SPEREDEL VREIZH  
1952

# AR BEDENN EVIT AR VRO




Embannet gant  
UNVANIEZH SPEREDEL VREIZH  
1952

AOTREADUR DA VOULAN :

Sant Brieg. 25 genver 1952.

BROCHEN,

**Vikel vras.**



## AR BEDENN EVIT AR VRO

---

### GALV D'AN HOLL VRETONED

C'hoari biniou, dañsa, bezañ en ur c'helc'h keltiek a zo un dra vat. Komz brezhoneg, stourm evit ar vro a zo un dra welloc'h c'hoazh. Met n'eo ket awalc'h. Breiz n'eo ket ur gwiskamant hepken, n'eo ket gizioù kozh hepken, n'eo ket un istor hepken. Breizh a zo dreist-holl ur spered, un ene, ur galon. Spered hag ene a dleomp klask kompren ha karout muioc'h mui, evit o lakaat da splannañ ha da skediñ.

Met penaos karout evit gwir hor bro, ni Kristenien, hep pediñ eviti an Aotrou Doue. Traou ar bed en dro dimp a chom teñval ha trubuilhus : an eur eo da bediñ. Ar rivin hag ar brezel a c'hell arc'hoazh en em ledañ adarre war broioù Europa. Pedomp evel m'he deus goulennet ar Werc'hez Vari e Fatima.

Hep douetañs ebet n'a ket Breizh war wellaat. Muioc'h mui e welomp a bep tu chapelioù o kouezhañ en o foull, dizurzh, dismantroù.

Ho kervel a reomp, c'hwi holl, Bretoned, da bediñ evit ho pro. Roit hoc'h ano d'ar BEDENN EVIT AR VRO, ha dalc'hit start d'ar pezh ho po prometet, evit ma tihuno an Aotrou Doue, kalonoù morgousket ar Vretoned.

TRI DEREZ a zo, hag e c'hellit dibab hini pe hini anezho hervez ho soñj hag ho c'hoant.

#### Derez kentan.

Lavarout bemdez diouzh ar mintin ha diouzh an noz, ur *Baier* hag un *Ave*, e Brezhoneg. Ha war o lerc'h lavarout :

Itron Varia Vreizh, pedit evidomp.  
Sant Mikael, patron ar Gelted, pedit evidomp.  
Sent Breizh, pedit evidomp.

#### Eil derez.

1. Lavarout evit Breizh diouzh ar beure ha diouzh an noz, ar pedennoù ez oc'h kustum d'ober ganto.

Stagañ war o lerc'h ar pedennoù-mañ :

Hon salvit, o Doue armeadoù an neñv.

Diskouezit dimp splannder ho fas, ha salvet e vimp.

Pedomp :

Aotrou Doue, c'hwi hag a ro nerzh ha sikour d'ar re a esper ennoc'h, selaout ouzhimp p'hoc'h aspedomp evit hon Bro. Teurvezit reiñ dimp sklerijenn ar spered hag adsav ar galon ma c'hellimp ho servijout a galon laouen. Ni ho ped dre Jezuz Krist, ho mab hag hon Aotrou, a vev hag a ren Doue ganeoc'h en unander ar Spered Glan, a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Itron Varia Vreizh, pedit evidomp.  
Sant Mikael, patron ar Gelted, pedit evidomp.  
Sent Breizh, pedit evidomp.

2. Komunian ur wech ar miz evit ar vro.

3. Evit an dud dimezet, lavarout ar pedennoù-se a gevret.

#### Trede derez.

1. Lavarout diouzh ar beure ha diouzh an noz, pe an ofis bihan a embannomp amañ war lerc'h, pe tra pe dra eus ofis an Iliz (Meuleudioù ha Prim diouzh ar mintin, Gousperoù pe Komplidoù diouzh an noz).

2. Ober ul lennadenn speredel bemdez : Skritur sakr pe levr a zevesion.

3. Ober ur retred hep daou vloaz.

#### Evit ar veleien.

1. Lavarout ur wech ar miz, pe oferenn-ouestl (missa votiva) an Hollsent evit enoriñ Sent ar Vro, pe oferenn-ouestl ur sant eus ar vro (Patroned ar Vro, patron an Eskopti, patron ar barrez), pe gentoc'h c'hoazh, oferenn-ouestl ar Werc'hez Vari.

2. Lavarout bemdez goude echuiñ ar Brevial :

Itron Varia Vreizh, pedit evidomp.  
Sant Mikael, patron ar Gelted, pedit evidomp.  
Sent Breizh, pedit evidomp.

\*  
\* \*

En em lakit en Unvaniezh, ha degasit an dud endro deoc'h d'ober kement-all.

## OFIS AR BEURE

Va Doue, deuit buan d'am skoazellañ.

Va Aotrou, hastit d'am harpañ.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab  
Ha d'ar Spered Santel,

Evel ma oa er penn kentañ ha bremañ ha da viken  
A gantvedoù da gantvedoù. Amen. Allelouia !

### *Psalm 32 (13-22)*

Eus lein an neñvou e sell an Aotrou  
Evit gwelout holl vibion an dud.

Eus lec'h e annez e taol evezh  
Ouzh ar re holl a chom war an douar.

Eñ hag en deus stummet kalonoù an holl dud,  
Eñ a sell pizh ouzh o holl oberoù.

N'eo ket un arme vras a ro trec'h d'ar roue,  
Ha n'eo ket kalz a nerzh a salv ar brezelour.

Ne dalv ket ar marc'h evit trec'hiñ,  
N'eo ket e holl greñvder a savete.

Met setu daoulagad an Aotrou war ar re hag e zouj  
war an dud a esper en e c'hras.

Evit tennañ o eneoù eus ar maro  
Evit o magañ er gernez.

Hon ene a spi en Aotrou,  
Eñ a zo hor skoazell hag hor skoed.

Ennañ eta en em laouena hor c'halon,  
En e ano santel e fiziomp.

Ra vezo warnomp ho trugarez, Aotrou,  
Hervez maz esperomp ennoc'h.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab  
Ha d'ar Spered Santel,

Evel ma oa er penn kentañ ha bremañ ha da viken  
A gantvedoù da gantvedoù. Amen.

### *Psalm 42*

Roit din justis ha difennit va c'haoz  
A-enep ur vroad disakr ;

Diouzh an dud gaouiat ha fallakr  
Va dieubit ha va salvit.

Rak c'hwi, Doue, 'zo va difenn,  
Perak am argasit

Perak e kerzhan en dristidigezh  
Gwall-vreset gant an enebour ?

Kasit din ho sklerijenn hag ho fealded  
Int am blegno ;

Int am réno betek ho menez santel,  
Betek ho teltannoù !

Hag antren a rin da gaout hoc'h aoter, a Doue,  
Doue va levenez ha va drantiz ;

Hag ho meuliñ a rin war an delenn,  
Doue, va Doue !

Perak out mantret, va ene,  
Perak out strafuilhet ennon ?

Esper en Doue, rak e lidañ a rin c'hoazh,  
Eñ silvidigezh va dremm ha va Doue !

Klod d'an Tad ha d'ar Mab,  
Ha d'ar Spered Santel,

Evel ma oa er penn kentañ, ha bremañ, ha da viken,  
A gantvedoù da gantvedoù. Amen

*Psalm 33 (1-11)*

Bennigañ a rin an Aotrou e pep amzer,  
Dalc'hmat e veuleudi a vezo em genoù.

Va ene da lakay e glod en Aotrou,  
Ra glevo ha ra'n em laouenaio an dud izelek.

Kanmeulit ganin an Aotrou :  
Hag holl a gevret, lakomp uhel e ano.

Klasket em eus an Aotrou ha va selaouet en deus,  
Ha va zennet en deus eus an holl spouronoù.

Sellit outañ ma viot sederaet  
Ha na ruzio ket ho tremmoù gant ar vevh.

Ne vo ket droukskoet an nep en em repu ennañ :  
An Aotrou a zieub eneoù e servijerion.

Garmet en deus ar paour hag e selaouet en deus an Aotrou  
Hag e salvet en deus eus e holl enkreziou.

Ael an Aotrou a vez o kampañ  
En dro d'e zoujerion evit o dieubiñ.

Tañvait ha gwelit pegen c'hwek eo an Aotrou :  
Evurus an hini a glask ennañ repu.

Doujit an Aotrou, c'hwi e sent,  
Rak ne vank netra d'e zoujerion.

An dud vras, setu int reuzeudik ha naoniek :  
Klaskerion an Aotrou ne ra netra diouer dezho.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab,  
Ha d'ar Spered santel,

Evel ma oa er penn kentañ ha bremañ ha da viken  
a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

*Antifonenn* : Garmet en deus ar paour, hag an Aotrou en  
deus e salvet eus e holl enkreziou.

O Krist, mab an Doue bev, ho pet truez ouzhimp. (2 wech)  
C'hwi azezet a zehoù d'an Tad. Ho pet truez ouzhimp.  
Klod d'an Tad ha d'ar Mab, ha d'ar Spered santel.  
O Krist, mab an Doue bev, ho pet truez ouzhimp.

Hor salvit, a Doue armeadoù an neñv.  
Diskouezet dimp splannder ho tremm ha salvet e vimp.

Pedomp.

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo nerzh ha sikour ar re a  
esper ennoc'h, lakit splannder ho tremm da barañ hizio war  
hor bro : teurvezit reiñ dimp-ni sklerijenn a spered hag  
adsav a galon, ma c'hellimp ho servijout a garantez laouen.  
Ni ho ped dre J. K. ho mab hag hon Aotrou, a vev hag  
a ren, Doue ganeoc'h en unander ar Spered Glan, a gant-  
vedoù da gantvedoù. Amen.

Bennigomp an Aotrou.  
Bennozh da Zoue.

Itron Varia Vreizh, pedit evidomp.  
Sant Mikael, patron ar Gelted, pedit evidomp.  
Sent Breizh, pedit evidomp.

Santez Vari hag holl sent Breizh da bedo evidomp dirak  
an Aotrou, ma vo roet dimp bezañ skoazellañ ha salvet gant  
an hini a vev hag a ren a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

---

OFIS AN NOZ

Hon Tad hag a zo en neñv...  
Me gofes ouzh Doue...

Va Doue deuit buan d'am skoazellañ.  
Va Aotrou, hastit d'am harpañ.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab...

*Psalm 122*

Sevel a ran va daoulagad war-du ennoc'h  
C'hwi hag a chom en neñvoù :

Setu-int evel daoulagad ar sklaved  
Etrezek daouarn o mistri.

Evel daoulagad ar vatezh  
Etrezek daouarn he mestrez,

Evelse hon daoulagad war-du an Aotrou, hon Doue  
Betek m'en devo truez ouzhimp.

Ho pet truez, Aotrou, ho pet truez ouzhimp,  
Rak hor gwalc'h a zismegañs hon eus bet betek re.

E walc'h en deus bet hon ene betek re  
Eus goaperezh ar vrabañserion,  
Eus dismegañs al lorc'heion.

Klod d'an Tad, ha d'ar Mab,  
Ha d'ar Spered Santel,

Evel ma oa er penn kentañ, ha bremañ, ha da viken ;  
A gantvedoù da gantvedoù. Amen.

*Psalm 12*

Betek pegeit, Aotrou, am ankouaat ? Betek biken ?  
Betek pegeit e kuzhot ho tremm diouzhin-me ?

Betek pegeit e rodellin doanioù em ene  
Glac'har em c'halon bemdeiz ?

Betek pegeit e c'honezo warnon va enebour ?  
Sellit, va selaouit, Aotrou, va Doue !

Roit ho sklerijenn d'am daoulagad na gouskin ket er maro,  
Na lavaro ket va enebour : Trec'het em eus warnañ !

Na drido ket va diarbennerion ouzh va gwelout o kouezhañ  
Goude bezañ en em fiziet en ho trugarez.

Hogen ra drido va c'halon en abeg d'ho skoazell,  
Ra ganin an Aotrou en deus graet vat din-me.

Klod d'an Tad...

*Psalm 130*

Aotrou, n'eo ket lorc'hus va c'halon  
Ha n'eo ket balc'h va daoulagad.

Ne glaskan ket traou re vras  
Na re uhel diouzhin-me.

Daoust ha n'em eus ket plaenaet  
Ha sioulaet va ene ?

Evel ur bugelig war vrennid e vamm  
Evel ur bugelig, va ene ennon-me.

A Israhel, esper en Aotrou,  
Bremañ ha da holl viken.

Klod d'an Tad...

*Antifonenn* : Sevel a ran va daoulagad war du ennoc'h,  
Aotrou.

Etre ho taouarn sakr e lakan va spered, Aotrou. (2 wech)  
Hon dasprenet hoc'h eus, Doue a lealded. E lakan va spered,  
Aotrou. Klod d'an Tad, ha d'ar Mab ha d'ar Spered Santel.  
Etre ho taouarn sakr e lakan va spered, Aotrou.

Hon diwallit, Aotrou, evel mab al lagad.  
Dindan skeud hoc'h eskell hor gwarezit.

Pedomp.

Argasit pell diouzhimp, ni ho ped, Aotrou, korvigelloù  
an enebour, ra zeuio hoc'h Aeled sakr da chom en hon  
touez d'hor skoazellañ en hon enkreuz ha d'hon diwall en

ho peoc'h, ha ra vezo bepred ho pennozh warnomp. Ni  
ho ped dre J. K. ho mab hag hon Aotrou, a vev hag a ren  
Doue ganeoc'h, en unander ar Spered Glan, a gantvedoù da  
gantvedoù. Amen.

Bennigomp an Aotrou.  
Bennozh da Zoue.

Salud Rouanez, o Mari, mamm a druez, buhez ha douster  
hag esper hor c'haezhrezh. Etrezek ennoc'h e kriomp e  
kreiz hon arvar. Klevit hon huanad pa c'harmomp en  
daeroù eus an draonienn-mañ a c'hlac'har. Troit eta  
war-du hon dienez kened dispar ho taoulagad trugare-  
zus, hon advokadez. Ha Jezuz, ho mab santel, frouezh  
ho korf benniget, e ziskouezit dimp en neñvoù, er  
vuhez. Mamm ken dous, o ken mat, o mamm ar joa, Itron  
Varia.

Sant Mikael, patron ar Gelled, pedit evidomp.  
Sent Breizh, pedit evidomp. Amen.

---



---

Les Presses Bretonnes, Imprimeur, St-Brieuc, n° 31.1562.

---